



Ur vagig

Skrivet gant : Maxime Piolot, troet e brezhoneg gant ?

Pladenn : Ur marmouz bihan

Ur vagig
A c'hoarzh hag a ouel
A vev hag a varv
'vel ur pesketaer
Ur vagig
Zo'vel an inizi
Bez'eo ken dister
Ha bloñsoù tener

Ur vagig
Pe vras, pe seder
A zo un dra gaer
Pa ya war ar mor
Ur vagig
Gant pesked er bourzh
Pe bezhin d'ar c'houlz
Keit ha ma vo mor

Ur vagig
Pa zeu gouloù deiz
A zilez ar porzh
,vit eostiñ he freizh.
Ur vagig
A zo 'vel ur paotr
Pe gouelan an aod
Dirak ar mor glas

Ur vagig
A zoug un anv
A gan liv ar vro
D'an hol tro-war-dro
Ur vagig
'vit mont war 'r mor bras
A zoug anv plac'h
Pe gatell pe soaz

Ur vagig
Hec'h ene a gan
He daeloù 'zo glan
'vel ur plac'hig gwenn-kann
Ur vagig
Ar marv ,oar ket
Pa ya ,r vag da get
'N he c'houk 'mañ war c'hed